

Brest 8 aout 1885

**RECIT**

COMPOSET A NEVEZ

**VAR UN TOL VAILLANTIS**

ERRUET A DOST DA PARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMENET

xt / tt

*Var eun ton nevez*

Me o ped assistantet da clevet recitan  
 Ma-unan non estonet dimeus a guemen-man,  
 Ar pez a so arruet var ar c'hopi gallec,  
 Mar gallan gout ar feçon d'ho zrei en brezonned.

Mes, quent avanç davantach, e c'houllan sclerijen  
 Digant ar Speret-Santel da rimar pen-da-ben  
 Quement guir a so scrivet var ar c'hopi gallec,  
 Ha d'ho esplican facil d'an oll en brezonned.

Ur vreg yaouanc magueres, o trietrei a Baris,  
 Aet e querc'bat ur buguel'eus a dy ar bourse his  
 Da gass ganti da vagan en tous he bugale,  
 Evit zicour o zevel ha gonit bara dë.

Dre ur c'hoat a renc tramen o vont da graut ar guer  
 Hac eo bet attaqueut, sivouas! gant ur voler,  
 Hac en guisquet en bellec, o tout d'he-bonjouri :  
 Ar goad en e goaziet a deu da remui.

• Bonjour, eme an den-man, erru o'ch, ma greg vad ;  
 — Ha dec'h' pareillament emei, a utro 'n abbat ;  
 Sonet non ous o goellet aman ho paseal,  
 Rac ar c'hoat-man so brudet da vean un douf fall.

— Doue, eme al laer-man ; a breserv pep hini :  
 Me so aman o vale d'a neun diseno,  
 Hac e meus ma flijadur o c'hortos overnia ;  
 Da larat ma brouwial na deu den d'ani zr'bla. ,

O qerzet en e c'hever en deus interrojet  
 - Da c'houl a belech' e teue ha pelec'h oa bet,  
 O voelet e voa ganti var e brec'h ur buguel,  
 Hac en guisquet ar c'haeran, casi evel eun'ell.

Goud'e eun deus goulonnet incontinent,  
 Ha n'e devoa bet netra evit avançamant,  
 O quemeret ar buguel da zicour e soignoi,  
 Da denna ar virione, ma galfe, diganii.

Eus, emei, au tro n'abbat, arc'hant a meus touchet  
 Cant livr e meus recevet evit e guemeret,  
 Nemert ma'meus ar greden e collin ma bue,  
 Quet mont emes ar c'hoat-man, au innocuant ha me.

— Na sonjet quet quement-se, emean, ma greg vad ;  
 Me a vo dec'h' compagnon da vont er mæs ar c'hoat,  
 E zuc'h' gant ar c'habiten, n'ho pezo droug ebet,  
 Nemert ma renque t'rentan ar pez o c'heus touchet. ,

A zindan e soutanen e tennas ur zabren  
 Hag e savas anezi ractal a os d'he fenn :  
 Hag e c'houlennas ganti ar yalc'h pe ar vue,  
 Ha laret dean pelec'h en deus laquet ane.

• Plasset a meus aneze eun dro d'ann innoçant ;  
 Goel eo ganen ma bue evit aour hac arc'hant,  
 Caët a ret aneze o tout d'e zispaca,  
 Ha lest ma bue ganen hac e hini gantan. ,

Cregui a ra er buguel en ur memes instant,  
 Evit dont d'e zispacan da guemer an arc'hant  
 Dre permission Doue e tapas ar zabren,  
 Ha gant eun tol, dre vonheur, en deus rannet e benn -  
 Hep m'en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,  
 E renquas mervel eno ur plaq subitamant.  
 Hag ar vreg, hag ar buguel dre viracl zo rentet  
 Voar an hent bras pareabl, ep m'ho deus droug ebet.

Tri gendarm a erruas hac o deus goulenet,  
 O veled ar goad dionti, petra oa arruet,  
 Hac en deveus ispliquet diraze peu-da-ben  
 Devoa lazet ar mestr dimeus ar volerien.

• Dont a reet ganemp-ni, emeze, var o quis, —  
 Evit ma elomp goelet ar merq ho vaillantis. ,  
 Pa oue foullet an den-man, eo e armo cavet.  
 Diou bistolen a daou den, ur sabren, ur sifflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac ho procès-verbal,  
 Unan demeus ar gendarm a c'hoez enni ractal,  
 Hac en en rentals pevar deus e gamarado  
 Da velet o c'habiten var an douar maro

Pa veljont an abijo e fellas d'he tec'hel :  
 Eu um rent a renqont pe deuan da vervel,  
 Ha lezel ho garroti hac ho c'has d'ar prison :  
 En Paris e recevont ho c'hoondanation.

q70

*Lanhon, Intanez Ar Goffic, levrer.*